

- À CHAQUE FOIS QUE : **seul gwezh ma, seul taol ma.**
 - *Seul gwezh ma tigor e veg e lâr sotonioù.*
 - *Seul gwezh ma taomp amañ e ta soñj dimp ag hon bugaleaj.*
 - *Seul taol ma ya d'ar preti e fond leun a argant.*
- À CHAQUE INSTANT : **da beb termen.**
- À FORCE DE : **dre sour, dre hir, dre forzh.**
 - *Dre sour labourad...*
 - *Dre hir soñjal...*
- AUSSITÔT : **kentizh, ragtal, diouzhtu, kerkent.**
 -
- AU SUJET DE : **a-zivoud, diwar-benn.**
- BIEN QUE : **na boud.**
 - *Daet e oa memestra, na boud e oa klañv.*
- DE CONTRE : **diouzh, a-zoc'h.**
 - *Distaget he doa ar skritell a-zoc'h ar vur.*
- DE DESSOUS : **a-zan, a-zindan.**
- DE DESSUS : **diwar, a-ziwar.**
 - *Lamit ar journal diwar an daol !*
- DE TEMPS EN TEMPS : **da beb an amzer, dre beb diw wezh.**
 - *Dre beb diw wezh hebkén e yae ar paourkaezh krouadur-se d'ar skol.*
- D'ICI LÀ (pour lors) : **a-benn eno.**
 - *Da Bask e tay amañ, mez a-benn eno hor bo achuet kempenn ar gampr.*
- EN L'ESPACE DE : **e-korf, en ur ober.**
 - *D'am soñj hor bo achuet ar labour-mañ e-korf tri devezh.*
- EN MEME TEMPS : **war-un-dro, asamblez, asambl.**
- EST-CE QUE : **ha, daoust hag-eñv, daoustoc'h ma.**
 - *Ha braw e vo an amzer ?*
 - *Daoustoc'h ma vo braw an amzer ?*
 - *Daoust hag-eñv e vo braw an amzer ?*
 - *Daoust ha braw e vo an amzer ?*
- ÉTANT DONNÉ QUE : **é voud ma, o vezañ ma.**
- IL FAUT QUE : **red eo ma (+ amzer da zont), daw eo ma, rekiz e vo ma.**
 - *Red eo ma sento ar vugale-se.*
 - *Red eo ma vo prest an oto da greisteiz.*
 - *Red eo ma vo tommoc'h ar soubenn.*
 - *Red e vo dezhañ doned amañ.*
 - *Daw e oa bet dezhi achap buan.*
 - *Rekiz eo ma vo gwisket braw.*
- IL N'Y A PAS QUE : **estroc'h, estreged, ket+hebkén.**
 - *Estroc'h evidoc'h a oui lenn. (=egedoc'h = estregedoc'h).*
 - *Estroc'h evite zo en c'hoari. (=egete = estregete).*
 - *Estroc'h evidin a c'hell henn ober. (=egedon = estregedon).*
 - *Ne oa ket hi hebkén a ouie lenn.*
- IL N'Y A QUE : **nemed, hebkén.**
 - *N'eus (ket) nemedin er gêr.*
 - *N'eus ket 'metañ er c'hlas.*
 - *Hi hebkén a gomz arabeg en ti-mañ.*
 - *Ne oa ket nemed ur voutailhad gwin goulle war an daol.*
- JE ME DEMANDE SI : **en em c'houlenn a ran ha, en em c'houlenn a ran mar, mechal ha, mechal mar.**
 - *En em c'houlenn a ran ha eñv a zay & en em c'houlenn a ran mar day.*
 - *Mechal ma vo kêr arc'hoazh...*

- *Mechal ma en deus komprenet...*
- JE VEUX QUE : **me a venn ma** (+ amzer da zont) ; **felloud a ra din, faotoud a ra din** ('faot din ma).
 - *Me 'venn ma tay, me 'venn ma teuio.*
 - *Me 'venn ma troio a-gleiz.*
 - *Mennoud a raomp ma kuitay ar vro.*
- MALGRE : **daousto da, en despet da.**
 - *Daet e oa, en despet d'ar glaw.*
 - *Daousto dezhañ boud divlank e oa daet memestra.*
- MÊME SI : **na boud.**
 - *Daet e oant d'ar gêr en-dro, na boud e ouient ne vehent ket degemeret mat.*
 - *Preniñ a rin ar vantell-mañ diouzhtu, na boud ema kêr un tammig.*
- PAR AILLEURS : **a-hend-all, a-hend-arall.**
- PARCE QUE : **rag ma, abalamour ma, a-gaoz ma, dre ma, dre an arbenn ma, dre an abeg ma...**
 - *Abalamour ma oa re yein (FAV).*
 - *Dre an arbenn ma oant re gozh (FAV).*
 - *Ned aimp ket er-maez abalamour d'ar wall-amzer (Here).*
 - *Abalamour dit ez eo bet skandalet (Here).*
- PAR DESSOUS : **dre zindan, dre zan.**
- PETIT À PETIT : **a-nebeudigoù, a-nebeudoù.**
- POUR QUOI FAIRE : **da betra.**
- POURTANT : **nawazh, koulskoude, padal.**
- PUISQUE : **peogwir, pandeogwir.**
 - *Ne c'hello ket dont peogwir ema war e wele (FAV).*
 - *Deus ganin peogwir eh an di (FAV).*
 - *(N'int ket waet) peogwir ne oant ket bet pedet (FAV).*
- QUAND BIEN MÊME : **nag.**
 - *Nag e vehet 'h mab d'ur roue...*
 - *Nag ho pehe gounezet er loto e vehe red deoc'h sevel beb mitin.*
 - *Nag e vehe mab-den mestr an ollved, ataw e chomo tregaset gant ster ar vuhez.*
- SELON : **hervez.**
- SOUS PRETEXTE DE : **e-sigur.**
 - *Waet e oa d'An Oriant g'an otokarr e-sigur klask labour.*
- TOUR À TOUR : **tro-ha-tro.**
 - *Daet e oant oll, ha tro-ha-tro e tennent d'ar sort.*
- TOUT AUTOUR DE : **tro-dro da.**
 - *Boud e oa ar vugale é redeg tro-dro d'an iliz-rouanez.*
- TOUT LE LONG DE : **hed-ha-hed da** (« hetahed »).
 - *E oant o daou o vale hed-ha-hed ar ganol.*
- TOUT PRÈS DE : **tostig tra da.**
- VERS : **trema, dawid, tresa, da gavoud.**
- TANT QU'À FAIRE : **beteg ober, kement hag ober.**
- TANT QUE, JUSQU'A CE QUE : **ken na, tra ma.**
 - *Ha hi a lâr ne savo ket ken na vo braz he fousined.*
 - *Reiñ dezhi ur vouezh a gomzo d'he gwellañ bugale, ken na baouezint *da selaou ouzh mouezh ar vro all. (Roparz Hemon, UBAB, p51). (*da >>> a)*
 - *Tra ma vo 'r mor (Bro gozh).*
- TANDIS QUE : **endra ma.**
 - *Endra ma kendalc'he Dance gant e gaoz, ez ae hag e teue ar marc'heg dre ar sal (Yeun ar Gow, Enez an teñzor).*